

Gwelout a ran va yezh o vevañ

*Gwelout a ran va yezh o vevañ ;
ganet eo bet dirazon,
o leñvañ gant levenez he buhez
nevez, hag anavezout a ran
he dremm, ar mousc'hoarzh yaouank
hag an tan en he daoulagad.*

*Gwelout a ran va yezh o vevañ ;
mont a ra d'ar skol bemdez,
he sac'h skol leun gant levrioù,
leun gant euriadoù memes
ha leun gant gerioù he bro,
leun gant istorioù gwechall-gozh
ha menozioù pep warc'hoazh a vezo...
Ur sac'h skol leun gant barzhoniezh
ar galon.*

*Gwelout a ran va yezh o vevañ ;
emañ bremañ o timeziñ
hag o rannañ pokoù hir
er parkoù aour, teod war deod
o santiñ stumm pep ger,
pep ger oc'h ober gilic d'ar gouzoug
en ur lonkañ beradoù Brezhoneg
etre pep pok.*

*Gwelout a ran va yezh o vevañ
etre kerent dindan ur ganevedenn,
ha bugale vihan a glask an alc'houez aour
e fin an hent liesliv. Gwel' a ran
deizioù brav an dazont bras
e-lec'h ma wel' va yezh he bugel dezhi
o vezañ ganet hag o leñvañ gant levenez
ur vuhez nevez en he divrec'h...*